

# KELEIER 5F AN NAONED



# Keleier an Naoned

kelaouenn vizek savet gant Naonediz hag embannet e kêr an Naoned abaoe miz Genver 1974  
(liesskrivet betek dibenn 1975 ha moulet abaoe miz Genver 1976)

Niver a skouerennoù tennet eus an niverenn-mañ : 500

Ti-moulerzh : Copie 22 PEDERNEC (Bro-Dreger)

Burevioù : 79, Quai de la Fosse — 44000 NANTES

Merourez : an It. Gwenola ROSSINYOL, 11, rue de l'Ascension, 44700 ORVAULT

Kont-bank : Niverenn 58 190 1081 Banque Populaire Bretagne Atlantique (BPBA), Agence du Pont du

Cens, 40, route de Rennes, 44300 NANTES

Koumanant-bloaz : 50,00 F (dek niverenn)

Koumanant evit ar re a zo treut o yalc'h : 25,00 F

Kregiñ a ra ar c'houmanantoù e penn kentañ ar bloaz

Bloavezh 1976 klok (dek niverenn, 240 pajenn) : 25,00 F

## Lizhiri

Gant kalz dudi em eus lennet pennad Gwenola ROSSINYOL diwar-benn ar plant kontammus e Breizh. N'em bo ket ezhomm da vont da di an apotiker ha da zispign kalz arc'hant evit kav out an doare gwellañ da gas va mamm-gaer «ad patres». Reiñ a rit deomp un dibab ledan-tre a vinimoù naturel ha marc'had-mat-kenañ evit en em zizober diouzh tud 'zo... Reiñ a rit deomp zoken munudoù skrijus war efedoù pep hini : «seizadur an nervennoù, c'hwezennoù, gliziennoù, sec'hed bras, mezevelladurioù, mougadur, droug-bouzelloù spontus, heugoù, dislonkadurioù, poan-gof, foerell...». Spontus eo e gwirionez soñjal pegen dañjerus eo ar plant a gavomp en-dro deomp. Pa soñjan em eus kinniget brugwez bleuñvus pe louzaouenn-an-hañv meur a wech da gerent ha mignoned 'zo. Spi am eus ne lennint ket ho pennad !!! Evel ma skrivit e dibenn ho pennad ez eo risklus-tre lezel ar vugale da c'hoari el liorzhoù ha da vont war ar maez hag er c'hoadoù. Suroc'h eo derc'hel anezho er gêr pe e lec'hioù koultronet ha simantet. Ret eo tec'hout diouzh an natur ha diouzh he zaolioù-trubarderezh !

R.N., Vertou

Mantret on bet o lenn ar ger AR PIRC'HIRIN evit *LE PELERIN* e niverenn 8 **KELEIER AN NAONED** (Here 1976) e pennad *Berc'hed «A-enep d'ar c'hreizennoù nukleel»*. Lu a-grenn eo an droidigezh-mañ.

Hag eñ ne ouzoc'h ket en deus ar c'humun-mañ un anv brezhonek rik testenjekaet gant meur a destenn gozh ? Kavout a reer ar stumm *PENTELLO* e 1063 hag ivez ar stumm latinekaet *PONTELLUS*. E 1065 e kaver *PONTELLUM*.

N'eo ket diaes kavout orin ar ger *PENTELLO*. El lec'h-se e veze yalc'het un dell (un taos) war ar besketaerien, Perak el lec'h-se ? Peogwir emañ war vevenn an dour sall hag an dour disall, e penn un tachad-pesketañ. *TELL* a zo *TOLL* e kerneweg hag e kembraeg ha tremenet eo e saozneg evit talvezout gwir-treizh. Diwar ar ger-mañ moarvat ez eo bet stummet ivez un anv-lec'h all er c'humun, *La TELIndièle*, war ribl al Liger.

Er c'humun-mañ c'hoazh e kaver ur bern anvioù-lec'h a orin brezhonek : *La Bée* (Bez), *Le Margat* (Morgoad), *Le Bois Tillac* (Tilheg), *La Béhinnière*, gwechall *La Bihennière* (Bihan), *Ile Héret*, gwechall *Ile Trevelec* (Trev), *Les Petits*

*Favris* (Fav, Faou), *La Noë Fausse-reau*, *La Noëlle*, *Les Grandes Noëllés* (Noed, Noued), *Pilon*, gwechall *Pilaon* (Pyl-Avon = Tuchenn ar stêr), h.a...

Per Manac'h,  
kabiten a vor  
Ourvez-Naoned

Trugarekaat a reomp hor c'hen skriver evit e lizher dudies. Gant Téó JEUSSET e voe kinniget an droidigezh AR PIRC'HIRIN evit *LE PELLERIN* (SAV Nnoù 27-31, 1943 ha 1944, **AL LIAMM** Nn 14 Mae-Gouere 1949).

N'eo ket ken lu-se peogwir e kaver er bloavezh 1030 dija anv eus *Sancta Maria de Peregrino* (Dielloù-departamant Liger-Atlantel H 151) ha *Castrum Peregrini* e 1216 (Diellevr Manati Buzay). Kozh-tre eo eta ar ster PIRC'HIRIN ivez.

Gwir eo avat e kaver an daou anv e 1065 en ul lizher kaset gant KIRIAG Eskob an Naoned da Abad Marmoutiers : «... *Et quia Bairiacus et Pontellum quod dicitur Peregrinum pro Pontello unum denarium et pro Bairiaco duos de bono et purissimo auro in festivitate SS. Apost. Petri et Pauli, etc. Signum Domini Quiriaci Nannet. Prefulis*». (Dom MORICE Prouennoù I-425).



Gwirheñvel eo displegadurioù hor c'henskriver. PENTELLO pe hiziv PENTELLOU a zo bet moarvat un anv roet d'al lec'h-se da vare Nevenoe, Erispoe pe Salaun, ha disoñjet, evel kalz anvioù-lec'h brezhonek all e Bro-Naoned, goude aloubadegoù an Normaned. Roet e voe un anv latin d'al lec'h neuze hag hemañ hepken a zo chomet hiziv.

Kement-mañ a zegas ac'hanomp da gudenn an anvioù-lec'h e Breizh, ha dreist-holl e Breizh-Uhel. Daoust hag eñ e ranker distreiñ d'ar stummoù koshañ, chomet dizimplij a-wechoù abaoe kantvedoù ?

Daoust hag eñ e ranker chom an tostañ posubl ouzh ar stumm implijet hiziv gant an dud ? Daoust hag eñ e ranker sevel anvioù nevez pe stummoù nevez eus anvioù kozh hervez ijin ar brezhoneg ha skouer an anvioù-lec'h e Breizh-Izel (da

skouer *GUERANDE* : GWENN + RANN = GWERANN evel PENN + ROZ = PERROZ e Bro-Dreger) ?

Ret eo diwall mat diouzh an heñveladurioù faltazius. Evit ober ul labour sirius e tleer da gentañ holl klask gouzout penaos e veze skrivet ha distaget an anvioù-lec'h gwechall. Kalz anvioù-lec'h brezhonek a zo bet gallekaet goude aloubadegoù an Normaned, goude stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall, da vare an Dispac'h Gall (dreist-holl e Bro-Raez rak diskaret e voe gant ar re c'hlas ur bern pennkêrioù) hag hiziv c'hoazh gant adaoz ar gladoù («*remembrement*»). Evit kement lec'h ez eus peurliesañ meur a anv pe veur a zoare da skrivañ an anv-se a-hed ar c'hantvedoù. Ret eo dastum anezho holl. Tu 'zo da furchal er c'hadastr, e dielloù an noterien, en dielloù-departamant...


Ul labour talvoudus-tre a zo bet graet dija e derou ar c'hantved-mañ gant Herri QUILGARS. Embannet en deus en Naoned e 1906 ul levr-diazez «*Dictionnaire topographique du département de la Loire Inférieure*» (a gaver e levr-oueg-kêr an Naoned hag en dielloù-departamant ivez).

Ul labour talvoudus-kenañ a zo bet graet dija gant an Doktor Jean TRICOIRE e Bro ar Me (korn-bro Kastellbriant ha traonienn ar Winun) met chomet eo diembann. N'eo ket bet studiet c'hoazh a-dost an anvioù-lec'h e korn-bro Ansiniz, e Bro-Raez, er Winieg... Emañ Kreizenn Sevenadur Keltiek Bro-Naoned e soñj sevel ur bodad-studi war gudenn an anvioù-lec'h e Bro-Naoned ha laouen e vo **KELEIER AN NAONED** da embann frouezh e labour.

Poltred ar golo a zo hini Alain CHENARD, Maer nevez an Naoned. Tennet eo an dresadenn-mañ, diouzh unan eus ar skritelloù bet peget miliadoù anezho war vegerioù an Naoned er miz-mañ.

Evit respont da bennad Ernest MENARD diwar-benn ar c'hreizennoù nukleel :

1990



«Arsa, Ernest ! P'eus ket soñj eus ar pennad az poa skrivet e-barzh KELEIER AN NAONED e 1977 : N'hellomp ket tremen hep kreizennoù derc'hanel ?»

# Maer nevez en Naoned



Ouzhpenn 76 vloaz e oa André MORICE, 40 vloaz eo hepken Alain CHENARD, Maer nevez an Naoned. E 1937, eo e voe ganet en Naoned, e lec'h ma oa e dad artizan-tredaner. E studioù a reas e Skol-Vistri Savenneg met, e-lec'h mont da skolaer, e troas war-du ar stlenna-taerezh (*informatique*) ha goude studioù all e teuas da vezañ ijinour. Emezelet en doa e luskad ar Yaouankiz Sokialour (stag ouzh ar Strollad sokialour kozh SFIO) da 19 vloaz. Dont a reas da vezañ sekretour-meur al luskad-mañ evit Liger-Atlantel ha da c'houde ezel eus ar burev broadel evit Frañs a-bezh. Gantañ e voe krouet en Naoned ur gevrenn eus ar c'hluboù Léo LAGRANGE (kluboù-sport di-war anv ar ministr sokialour evit ar sportoù e gouarnamant an tu kleiz «talbenn ar bobl» e 1936). Dont a reas ivez da vezañ sekretour eus kevrenn SFIO an Naoned.

E dilennadegoù 1965 e yelas

e-barzh kuzul-kêr an Naoned gant André MORICE hag en doa bodet en-dro dezhañ a bep seurt tud, eus an tu dehou betek an tu kleiz, nemet komunourien ha gaolisted. Dilennet e voe en-dro e 1971 hag anvet neuze da eil maer evit ar yaouankiz hag ar sportoù. Kuzulier-departamant e teuas ivez da vezañ e dilennadegoù 1973.

E-keit-se edo ar Strollad sokialour gall o'n em dreiñ kalz dindan renerezh François MITTERAND. War o leve ez eas nebeut ha nebeut ar renerien gozh evel Guy MOLLET ha ganto ez eas kuit ar rakvarnioù a-enep d'ar gomunourien. Skoulmet e voe un emglev gouarnamant, ar «program boutin», etre ar sokialourien, ar radikaled hag ar gomunourien, evit stourm a-gevret da gemer ar galloud e Frañs. Gourc'hemenet e voe ouzh ar sokialourien e pep lec'h troc'hañ o liammoù gant politikourien eus an tu dehou. E kuzul-kêr an Naoned e oa 12 kuzu-

lier sokialour renet gant André ROUTIER-PREUVOST, ur stourmer sokialour kozh hag a oa bet gwechall un dispac'hour gwirion o kemer perzh e brezel Bro-Spagn araok treiñ tamm-ha-tamm war an tu dehou. E-touez an 12 kuzulier-kêr-mañ ne voe nemet unan, Alain CHENARD, evit sentiñ ouzh gourc'hemennoù Paris e 1975 ha reiñ a reas e zilez eus e garg a eil maer. Chom a reas er c'huzul-kêr avat, met hiviziken e vouezhias a-enep da beurrest ar c'huzul. Taolet e voe ar re all er-maez eus ar strollad sokialour, en o zouez Christian CHAUVEL, a zo ivez kannad an Naoned e parlamant Paris... Evit goprañ e sentidigezh e voe anvet Alain CHENARD e 1976 da zanvez-maer gant pennoù bras ar strollad sokialour gall ha lakaet e penn ar roll eus an tu kleiz.

A-enep dezhañ en em ginnigas André MORICE adarre, daoust d'e oad. Fall e oa e yec'hed met ken lemm bepred e spered. Ranket en dije moarvat mont war e leve ha lakaat unan all en e lec'h abaoe ur pennad mat. Siwazh evitañ, ne oa ket unvanet tamm ebet ar c'huzul-kêr en-dro dezhañ. Dre ma oa André MORICE ur sigoter gwirion e oa bet gouest da lakaat da labourat a-gevret dindan e renerezh sokialourien, tud eus ar c'hreiz ha tud eus an tu dehou, ha zoken eus an tu dehou pellañ evel Lyonel PELLERIN, Christian ROY, Marc POLO ha re all (bourc'hizien vras hag a oa c'hoazh a-enep da zieubidigezh Aljeria e 1961-1962). Ur wech ma vije aet kuit André MORICE, o dije dirollet tabutoù taer etre ar re all evit kemer e blas ha kroget mat e oa an abadenn endeo abaoe daou vloaz. Anv a oa bet da lakaat en e blas ur mezeg eus kostezenn bolitikel GISCARD, an Doktor BARBIN. Lod a gomze ivez eus Lyonel PELLERIN, eus ROUTIER-PREUVOST, eus Daniel TARDY, eus Loïc SPARFEL (bet ganet e Brest hag hiziv



Prezidant eus Skol-Veur an Naoned). E-pad ur pennad zoken e voe ar baron Olivier GUICHARD e soñj da zilezel ar Baol evit dont d'en em ginnig en Naoned. A-benn ar fin e tivizas André MORICE en em ginnig e-unan adarre. Anat e oa koulskoude ne vije ket chomet c'hwec'h bloaz c'hoazh e peñn an ti-kêr ha setu perak kalz Naonediz n'o deus ket fellet dezho reiñ ur chekenn wenn dezhañ ha d'e vignoned.

Gellet en dije André MORICE derc'hel kont ivez eus faezhidigezh e vignoned en dilennadegoù-kanton e 1976. Trec'het e oa bet tud anavezet evel André ROUTIER-PREUVOST ha Christian CHAUVEL a oa o paouez kuitaat ar strollad sokialour gall dre enebiezh ouzh ar gomunourien. Krouet o doa ar strollad sokialour demokrat gant Eric HINTERMANN. Ne oant ket bet heuliet war an hent-mañ gant an dilennerien sokialour a roas kentoc'h o mouezhiadoù da zanvez-kuzulierien ar «program boutin». E 1965 ha 1971 e oa bet dilennet André MORICE gant ar mouezhiadoù sokialour, e-touez re all. Anat e oa ne oa ket tu da gontañ warno ken e 1977. Echu e oa politikerezh an «Trede Hent»...

Aet eo eta ar maout gant Alain CHENARD d'an 20 a viz Meurzh. Ne voe ket un trec'h bras rak n'eus bet nemet 619 mouezhiad diforc'h etre an tu dehou hag an tu kleiz. En droiad gentañ, d'an 13 a viz Meurzh en deus dastumet roll an tu kleiz 44,07 % eus ar mouezhiadoù (MITTERAND en devoa bet 48,02 % anezho en eil troiad e 1974 hag an tu kleiz 49 % e dilennadegoù-kanton 1976). Ret eo menegiñ ivez berzh dic'hortoz an trede roll en droiad gentañ. Dastumet en deus Philippe SOURDILLE, ur mezeg yaouank mignon da Vichel JOBERT 12,16 % eus ar mouezhiadoù, lod anezho moarvat digant tud dilaouen gant an daou roll all...

Iskis a-walc'h eo bet ar stourm etre an tu dehou hag an tu kleiz araok deiz an dilennadegoù. Peurlie sañ ez eus tagadennoù taer etre an daou du ha tro a vije bet en Naoned da rebechiñ da skouer ur bern traoù da André MORICE ha d'e vignoned met sioul-tre eo chomet an tu kleiz dre vras abalamour ma oa bet Alain CHENARD er c'huzul-kêr gant ar maer kozh e-pad 12 vloaz hag a-du bepred gantañ betek 1975.

Traoù souezhus all a vez gwelet en Naoned. E Bro-C'hall ha muioc'h c'hoazh moarvat e Breizh ez a buan war-raok ar strollad sokialour nevez abaoe un nebeut bloavezhioù met disheñvel a-walc'h eo e izili diouzh ar re gozh. Hengoun an SFIO a oa un hengoun enep-komunour ha lik (war an dachenn-mañ e oant tost-tre eus tud eus an tu dehou pe eus an tu kreiz evel André MORICE ha kalz anezho a oa frañmasoned da skouer). Ul lodenn vras eus ar renerien gozh a zo aet kuit eus ar strollad sokialour tra ma teue e-barzh izili nevez tost a-walc'h ouzh ar strollad komunour (tud ar CERES da skouer, levezonet kalz gant ar gelennadurezh marksour) ha kalz kristenien ivez (deuet d'ar sokialouriezh da skouer dre ar sindikadelezh CFDT). Stag eo Alain CHENARD kentoc'h ouzh an hengoun kozh met troc'het en deus al liammoù gant e gamaladed kozh ha gantañ ez eus tud disheñvel-krenn evel da skouer Guy GOUREAUX (46 vloaz), kelenner war ar skiantoù hag a zo ur c'hristen eus an tu kleiz, e penn eus luskad ar gristenien varksour en Naoned !

War roll Alain CHENARD ez eus un nebeut emsaverien wirion ha da gentañ penn evit ar wech kentañ unan hag a zo bet dilennet dindan anv ul luskad breizhat, U.D.B., Patrig PELLEN (26 vloaz, tredaner). Re all a zo bet dilennet dindan anv ar strollad radikal, evel da skouer, Patrig MARESCHAL (37 vloaz),

unan eus renerien all luskad B-5 a stourm evit adunvanidigezh Vreizh, ha Lionel DIVARD (33 bloaz) hag a oa en em ginniget evel danvez-kannad e 1973 evit **Strollad ar Vro** (hag a zo bet ivez gant e vreur ezel eus Talbenn Dieubiñ Breizh, paket gant ar bolis un nebeut bloavezhioù 'zo ha bac'het e Paris e-pad meur a vizvezh).

E-pad 12 vloaz en deus graet André MORICE un nebeut traoù evit Breizh. Lakaet en deus bannieloù erminiget da stlakañ a-us d'an ti-kêr ha da Gastell an Duged, kevellet kêr an Naoned gant Kêrdiz, kêrbenn Gembre, e 1966, aozet en Naoned Gouelioù Bras ar Folklor Keltiek e 1967, pedet ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel da zont d'an Naoned e 1974, roet un nebeut gwenneien d'ar CELIB, da gelc'hioù keltiek 'zo... met daoust m'en deus komzet alies eus Breizh en e brezegenoù n'en deus graet netra e gwirionez a-enep da bolitikerezh drastus ar gouarnamant evit diempañ Breizh, o vezañ ma c'hoantae ober eus an Naoned kêrbenn ar «c'hornog bras».

Arabat gortoz burzhudoù digant ar c'huzul-kêr nevez. Bez eus ennañ Bretoned emskiantek ha zoken broadelourien wirion met an darn vrasañ eus ar guzulierien (hag ar Maer e-unan) ne reont forzh. Lod zoken a zo a-enep da Vreizh. Ret eo gouzout ivez en deus ar prefeddi (da lavarout eo ar gouarnamant-kreiz drezañ) ur pouez bras war ar c'huzulioù-kêr, panevefe nemet war dachenn ar arc'hant. Arabat gortoz pep tra eta digant an dud dilennet ganeomp. Ret eo chom war evezh ha kenderc'hel da stourm. A bouez bras eo da skouer ez afe kalz Naonediz da **Gerzhadeg an Unvanidigezh** e Sant-Nazer d'ar 24 a viz Fbrel a zeu.

# Emdroadur ar Boblans e Bro-Naoned

Embannet ez eus bet un nebeut mizioù 'zo disoc'hoù an niveradeg diwezhañ bet kaset da benn e Frañs a-bezh e 1975. Kavet hon eus e oa talvoudus embann an disoc'hoù-mañ evit departamant Liger-Atlantel (a glot dre vras gant Bro-Naoned) e-barzh KELEIER an NAONED.

War an hent-mañ hon eus kejet gant ur skoilh hegasus, kudenn an anvioù-lec'h e Bro-Naoned. Ar gudenn-mañ ne raio nemet kreskiñ a feur ma kresko pouez ar brezhoneg e Bro-Naoned en-dro. Setu perak e ranko bezañ diskoulmet deiz pe zeiz. Gwir eo kement-mañ evit Breizh a-bezh ha n'eus ket tu evit ar mare da sevel ur gartenn eus hor bro rak n'eur ket sur eus an anvioù-lec'h da lakaat warni. Tabutoù diniver a savo c'hoazh war ar gudenn-mañ (evel m'hen diskouez splann lizher ul lenner en niverenn-mañ a-zivout anv «Ar Pic'hirin»).

Er pennad-mañ hon eus graet gant an anvioù gallek kefridiel (ofisiel) renket hervez urzh al lizherenneg, ha gant an anvioù bet kinniget gant Théo JEUSSET, Doue d'e bardono, en e studiadennoù. Graet hon eus ivez gant anvioù brezhonek all bet kavet amañ hag ahont, da skouer war ar gartenn gaer bet savet gwechall gant Remont DELAPORTE evit ar skolioù. Kumunioù 'zo n'o deus evit ar mare anv brezhonek ebet. Evit re all e vez kinniget a-wechoù daou anv disheñvel... Pal ar pennad-mañ n'eo ket diskoulmañ ar gudenn luziet-mañ, prederiañ war emdroadur ar boblans e Bro-Naoned ne lavaran ket. Klasket e vo diwezhatoc'h mont pelloc'h war dachenn an anvioù-lec'h gant skoazell al lenne-rien met bremañ ez eus anv a boblansouriezh.

Departamant pobletañ hor bro eo Liger-Atlantel. Emañ ur Breizhad war bevar o chom ennañ (hep kontañ ar Vretoned divroet evel-just rak diaes eo termenañ o niver resis). Tremenet eo poblañs an departamant-mañ eus 803 372 annezad e 1962 da 861 452 e 1968 ha da 934 499 e 1975. Hepdale e vo ur milion den o chom e Liger-Atlantel. Kresk ar boblans etre 1968 ha 1975 a zo bet 73 047 annezad, da lavarout eo + 8,5 % er seizh bloavezh-mañ pe c'hoazh + 1,2 % bep vloaz, pezh a zo kalz. Dont a ra eus kresk naturel ar boblans (diforc'h etre ar ganedigezhioù hag ar marvoù) met ivez, evit ul lodenn vras, eus an emdroadur (tud o tont eus peurrest Breizh hag eus Bro-C'hall da vevañ e Bro-Naoned).

O vezañ m'eo gorread an departamant 6 815,38 km<sup>2</sup> (681 538 hektar) e save an dudegezh keitat da 118 ann./km<sup>2</sup> e 1962, da 126 ANN/km<sup>2</sup> e 1968 ha da 137 ann./km<sup>2</sup> e 1975. Uheloc'h eo an dudegezh-mañ eget hini beurrest Breizh hag hini Bro-C'hall met kalz izeloc'h eo eget hini Bro-Saoz, hini Alamagn, hini Belgia ha dreist-holl hini an Izelvroioù (ouzhpenn 400 ann./km<sup>2</sup>). Arabat en em chalañ re eta, Bro-Naoned, evel peurrest Breizh, a c'hellfe reiñ bod d'ur boblans teir gwech brasoc'h pe vuioc'h c'hoazh zoken. E gwirionez 137 ann./km<sup>2</sup> n'eo nemet un niver keitat ha dizingalderioù bras a zo etre an dudegezh e kêr an Naoned hag an dudegezh e kornioù 'zo eus an departamant.

Digempouezet-kenañ eo e gwirionez dasparzh ar boblans rak emañ tost eus an hanter eus poblañs an departamant o vevañ e tachad-kêr an Naoned. Hemañ a gresk kalz buanoc'h eget peurrest

an departamant :

1962 :	359 791 annezad
1968 :	405 716 annezad
1975 :	453 500 annezad

Pa zalc'her kont ivez eus poblañs tachad-kêr Sant-Nazer :

1962 :	104 353 annezad
1968 :	110 897 annezad
1975 :	119 418 annezad

ne chom ket mui kalz tud en departamant er maez eus an daou dachad bras-mañ. Dister eo tachad-kêr Kastell-Brient en o c'heñver :

1962 :	10 852 annezad
1968 :	11 986 annezad
1975 :	13 231 annezad

Evit gwir ned a ket an traoù war wellat, tamm ebet. Etre 1968 ha 1975 ez eus kantonoù a zo kresket kalz o foblañs :

- Vertou :	+ 21,2 %
- Ar Chapel/Erzh :	+ 57,4 %
- Kerc'hfaou :	+ 59,4 %
- Sant-Hermelen :	+ 99,4 %

met ret eo lavarout ez int stag ouzh kêr an Naoned, int o-fevar... E-keit-se ez ae er c'hontrol war zigreskiñ poblañs kantonioù all :

- Nozieg :	- 4,2 %
- Lijieg :	- 4,4 %
- St-Per-Raez :	- 5,0 %
- Ruvieg :	- 5,1 %
- St-Sulian-Gwent :	- 5,7 %
- Derwal :	- 6,3 %
- Gwenvenez :	- 8,1 %

Bez ez eus 221 gomun e Liger-Atlantel ha 54 anezho a zo e-barzh tachad-pù-kêr enno muioc'h eget 5 000 annezad. Kresket he deus o foblañs eus + 10,6 %. Ar



167 kumun all n'eo kresket o foblañs e-keit-se nemet eus 3,1 % (tra ma kreske hini an departamant a-bezh eus 8,5 % da lavarout eo ez int chomet war-lerc'h). Splann eo eta emañ Bro-Naoned (evel an darn vrasañ eus Breizh, dreist-holl Kerv-Uhel hag hanternoz Bro-We-ned) o tont da vezañ un dezzerzh tra ma ya ar c'hêrioù bras da greskiñ dalc'hmata hag ar vuhez da vezañ diaesoc'h-diaesañ enno evit an dud. Klamm a ra alies ar pennoù bras er rannvroioù er-maez eus Paris a-enep da bouez ha da levezon spontus ar gêrbenn c'hall war beurest ar Stad c'hall (hag emañ ar gwir ganto rak n'eus ket ur Stad alle en Europa e lec'h maz eus un

digempouez ken bras etre ar gêrbenn ha peurrest ar vro) met an hevelep politikerezh dall a reont alies int o-unan. Ur sottoni drastus eo bet hep mar ebet a-bezh kuzul-kêr an Naoned strivañ di-baouez evel m'en deus graet e-pad daouzek vloaz evit ober eus an Naoned ur Paris bihan ur gêrbenn evit kornog Bro-C'hall a-bezh, diwar-goust Roazhon, Brest ha kêrioù all, ha dreist-holl diwar-goust anterinded Breizh (rak re vihan e oa Breizh evit an Aotrounez-se ha ret e oa d'an Naoned ren war ar «C'hornog» ha neket war Vreizh hepken). Bountet int bet evel-just war an hent-mañ gant renerien Paris hag a oa re laouen da

ziemprañ Breizh d'ar mare ma oa anv da adsevel ar rannvroioù... Kalz gwelloc'h e vije bet, e lec'h krouiñ tachenoù greantel ramzel en-dro d'an Naoned (Kerc'hfaou, Sant-Her melen...) klask dasparzhañ al labouradegoù war ar maez, evel ma vez graet e Bro-Suis pe en Alamagn, broioù ha n'int ket war hol lerc'h koulskoude, pell a se... Ne vije ket bet ezhomm da sevel kement-se a dourioù en Naoned evit berniañ enno tud evel konikled... Evit kreskiñ, kreskiñ, kreskiñ bepred muioc'h, o deus renerien an Naoned lakaet en arvar an amzer da zont.

Anv gallek kefridiel	Anv brezhonek kinniget ant Théo JEUSSET	Anv brezhonek all	Poblañs e 1962	Poblañs e 1968	Poblañs e 1975
Abbaretz	—	Abbaraez	2 020	2 007	1 828
Aigrefeuille-sur-Maine	Egrefouilh	—	1 076	1 280	1 489
Ancenis	—	Anseniz	5 095	5 639	6 986
Anetz	—	Anaez	604	687	955
Arthon-en-Retz	Arzhin	—	1 889	1 948	1 933
Assérac	—	Azerieg	1 179	1 151	1 079
Avessac	Avizeg	—	2 496	2 405	2 356
Barbechat	—	—	584	608	566
Basse-Goulaine	—	Goulenn-Izel	1 853	2 160	3 036
Batz-sur-Mer	Bazh-Gwerann	—	2 288	2 277	2 236
La Baule-Escoublac	Ar Baol-Eskobleg	—	13 004	13 336	15 006
Belligné	—	Belinie	1 464	1 418	1 292
La Bernerie-en-Retz	—	—	1 593	1 683	1 735
Besné	Bezenez	—	1 332	1 440	1 636
Le Bignon	—	Bignon	1 438	1 471	1 880
Blain	Blaen	—	6 531	7 052	7 153
La Boissière-du-Doré	—	Beuzaer	526	523	517
Bonnœuvre	Bunvre	—	575	566	524
Bouyae	—	Boueilh	1 520	1 607	2 209
Bouée	—	Boue	525	455	435
Bouguenais	Begonez	—	8 777	10 047	11 684
Bourgneuf-en-Retz	Bourc'h-Nevez	—	2 289	2 225	2 161
Boussay	—	Beuzeg	2 061	2 106	2 040
Bouvron	Bevrun	—	2 278	2 285	2 295
Brains	—	Bren	999	1 021	1 174
Campbon	Kammzin	—	2 650	2 569	2 666
Carquefou	Kerc'hfaou	—	3 287	3 744	6 239
Casson	—	Kason	690	647	608
Le Cellier	Keller	—	1 836	1 844	2 035

La Chapelle-Basse-Mer	—	Ar Chapel Izelvor	2 527	2 675	2 970
La Chapelle-des-Marais	—	Chapel-ar-Paludoù	2 476	2 550	2 767
La Chapelle-Glain	—	Chapel-Glaen	1 211	1 097	898
La Chapelle-Heulin	—	Chapel-Heulin	1 216	1 212	1 307
La Chapelle-Launay	—	Chapel-Gwern	1 211	1 307	1 354
La Chapelle-St-Sauveur	—	Chapel-Sant-Salver	684	664	617
La Chapelle-sur-Erdre	—	Ar Chapel-war-Erzh	2 525	2 878	5 858
Chateaubriant	—	Kastell-Brient	10 582	11 986	13 231
Chateauthebaud	—	Kastell-Tebot	1 461	1 377	1 573
Chauvé	—	—	1 337	1 307	1 238
Cheix-en-Retz	—	—	315	308	326
Cheméré	Kalverieg	—	1 250	1 240	1 238
La Chevallerais	—	—	512	499	495
La Chevrolière	—	—	2 004	2 139	2 444
Clisson	Klizun	—	3 719	4 179	4 537
Conquereuil	Kenguruz	—	1 138	1 048	959
Corcoué-sur-Logne	—	—	2 027	1 942	1 812
Cordemais	—	Kordemez	1 360	1 439	1 817
Corsept	—	—	810	807	951
Couëron	—	Koerun	11 739	12 380	13 396
Couffe	Kovieg	—	1 267	1 318	1 262
Le Croisic	Kroazig	—	4 017	4 102	4 243
Crossac	Krozeg	—	1 517	1 558	1 658
Derval	Derwal	—	2 702	2 675	2 591
Donges	Donz	—	6 263	6 458	6 280
Drefféac	Dreveg	—	867	859	803
Erblay	Ervoreg-Naoned	—	1 766	1 808	1 885
Fay-de-Bretagne	Ar Feun	—	2 191	2 127	1 965
Fégréac	—	Fegerieg	1 890	1 835	1 714
Fercé	Ferzieg	—	561	545	501
Fresnay-en-Retz	Fraenez-Raez	—	665	716	759
Le Fresne-sur-Loire	—	Fraenez	632	785	804
Frossay	Frozieg	—	2 171	2 018	1 913
Le Gavre	Gavr	—	911	861	825
Geneston	—	Banaleg	821	952	1 252
Gétigné	—	Jetinie	1 946	2 007	2 274
Gorges	—	Gorj	1 563	1 701	2 028
Grand-Auverné	Elverneg-Meur	—	1 041	1 051	905
Grandchamps-des-Fontaines	—	Gregam-ar-Stivelloù	1 281	1 291	1 578
La Grigonnais	—	Grigonez	786	780	806
Guemené-Penfao	Gwenvenez	—	5 189	4 977	4 590
Guenrouet	Gweroued	—	2 614	2 368	2 156
Guerande	Gwerann	—	6 389	6 499	7 644
La Haie-Fouassière	—	—	1 813	1 919	2 157
Haute-Goulaine	—	Goufenn-Uhel	1 815	1 981	2 582
Herbignac	Elvinieg-Meur	—	3 037	3 078	3 239
Héric	—	Herig	2 624	2 531	2 521
Indre	Endr	—	4 625	4 286	3 709
Issé	Izieg	—	1 892	1 898	1 909
Jans	Janz	—	1 145	1 076	991
Joué-sur-Erdre	—	—	2 009	1 882	1 724



Juigné-des-Moutiers	Yaouenieg	—	513	435	389
Le Landreau	—	Landrev	1 368	1 354	1 386
Lavau-sur-Loire	—	—	522	461	442
Legé	Lijieg	—	3 454	3 521	3 433
Ligné	Linieg	—	1 774	1 664	1 662
La Limouzinière	—	—	1 227	1 244	1 233
Le Loroux-Bottereau	An Oraour-Botrel	Tibidi-Botrel	3 067	3 204	3 488
Louisfert	Luferz	—	605	556	606
Lusanger	Luvieg	—	1 063	1 020	934
Machecoul	—	Machikoul	3 964	4 240	4 549
Maisdon-sur-Sèvre	—	—	1 296	1 284	1 331
Malville	—	—	902	856	1 037
La Marne	—	—	794	788	764
Marsac-sur-Don	Meurzheg	—	1 293	1 227	1 166
Masserac	Mazereg	—	603	571	509
Maumusson	—	—	894	862	824
Mauves-sur-Loire	Malo	—	1 359	1 403	1 741
La Meilleraye-de-Bretagne	—	—	1 172	1 129	1 045
Mésanger	—	Mesanjer	1 829	1 839	2 051
Mesquer	—	Mesker	1 034	1 019	1 015
Missillac	—	Misilheg	3 585	3 652	3 687
Moisdon-la-Rivière	Maezon	—	1 947	1 810	1 847
Monnières	—	—	953	941	1 019
La Montagne	—	Ar Menez	4 418	5 025	5 165
Montbert	—	—	1 585	1 614	1 734
Montoir-de-Bretagne	Mouster-Naoned	—	4 658	5 171	5 352
Montrelais	—	Montrelez	558	514	541
Mouais	Moe	—	377	356	331
Les Moutiers	—	Mousterou	654	614	635
Mouzell	Muzel	—	836	790	720
Mouzillon	—	Mouzilhon	1 327	1 357	1 404
Nantes	(An) Naoned	—	240 048	260 244	256 693
Nort-sur-Erdre	Nozr-war-Erzh	—	4 222	4 436	4 606
Notre-Dame-des-Landes	—	Itron-Varia-al-Lanneier	1 187	1 127	1 112
Noyal-sur-Brutz	Noal	—	351	385	376
Nozay	Nozieg	—	3 349 <sup>6</sup>	3 242	3 237
Orvault	Ourvez-Naoned	—	6 592	13 510	20 239
Oudon	—	Oudon	1 362	1 371	1 599
Paimbœuf	Pembo	—	3 580	3 802	3 565
Le Pallet	Ar Palez	—	1 371	1 442	1 507
Pannecé	Panzeg-Naoned	—	1 134	1 171	1 067
Paulx	—	—	1 574	1 516	1 382
Le Pellerin	Ar Pirc'hirin	Pentello	2 667	2 685	2 902
Petit-Auverné	Elverneg-Bihan	—	601	560	508
Petit-Mars	—	Meurzh-Bihan	1 062	1 086	1 204
Pierric	—	Pierig	974	896	791
Le Pin	—	Ar Pin	816	752	698
Piriac-sur-Mer	Piberieg	—	1 127	1 134	1 110
La Plaine-sur-Mer	—	—	1 475	1 635	1 797
La Planche	—	—	1 513	1 471	1 532
Plesse	Plesez	Plouesi/Pleseï	3 683	3 523	3 395
Pont-Saint-Martin	—	Pont-Sant-Marzhin	1 932	2 134	2 690
Pontchâteau	Pont-ar-C'hastell	—	5 334	3 835	6 394

Pornic	Porzhneizh	Pornig	7 179	7 568	8 154
Pornichet	—	Porniched	5 242	5 400	5 521
Port-Saint-Père	—	Porzh-Sant-Per	1 349	1 361	1 370
Pouillé-les-Coteaux	Paolieg-Naoned	—	572	570	515
Le Pouliguen	Ar Pöllgwenn	—	3 658	3 788	4 276
Préfailles	—	Prefailh	619	601	628
Prinquiau	Prevenker	—	1 220	1 214	1 475
Puceul	—	Puseul	724	685	609
Quilly	Killig	—	864	837	781
La Regrippière	—	—	984	957	950
La Remaudière	—	—	765	747	710
Remouillé	—	—	894	854	939
Rezé	Raezez	Reze	28 276	33 509	35 730
Riaillé	Reolieg	—	1 720	1 739	1 677
La Roche-Blanche	—	Ar Roc'h Gwenn	674	671	723
Rouans	—	—	1 520	1 443	1 447
Rouge	Ruvieg	—	2 011	1 995	1 982
La Rouxière	—	—	977	962	840
Ruffigné	Ruviniég-Naoned	—	806	723	684
Saffré	—	—	2 336	2 320	2 206
St-Aignan-de-Grand-Lieu	—	St-Inan-al-Lenn-Veur	1 372	1 357	1 717
St-André-des-Eaux	—	St-Andrev-an-Doureier	1 545	1 554	1 833
Sainte-Anne	—	Santez-Anna	1 321	1 233	1 532
St-Aubin-des-Châteaux	Sant-Albin	—	1 520	1 472	1 387
St-Brevin-les-Pins	—	Sant-Brewen	7 357	8 008	8 614
St-Colomban	—	Sant-Kolomban	1 642	1 657	1 625
St-Etienne-de-Mer-Morte	—	—	1 210	1 169	1 078
St-Etienne-de-Montluc	St-Stefan-ar-Menezlug	—	3 520	3 595	3 900
St-Fiacre-sur-Maine	—	Sant-Fiakr	636	651	761
Saint-Géréon	—	Sant-Jereon	1 172	1 648	1 911
St-Gildas-des-Bois	Sant-Weltaz-Lambrizig	St-Gweltaz-ar-C'hoadeier	2 659	2 510	2 521
Saint-Herblain	Sant-Hermelen-Naoned	—	11 990	17 568	39 867
Saint-Herblon	Sant-Hermelen	—	1 365	1 444	1 613
St-Hilaire-de-Chaléons	—	St-Hiler-Chaleons	1 304	1 311	1 255
St-Hilaire-de-Clisson	—	St-Hiler-Klizun	962	991	964
Saint-Jean-de-Boiseau	—	Sant-Yann-Boizel	2 487	2 615	3 102
Saint-Joachim	—	Sant-Yoakim	4 078	4 152	4 161
St-Julien-de-Concelles	—	Sant-Sulian-Konsel	3 555	3 850	4 272
St-Julien-de-Vouvantes	Sant-Sulian-Gwent	—	976	1 008	947
Saint-Léger-les-Vignes	—	—	451	451	484
Sainte-Luce-sur-Loire	—	Santez-Lus	2 929	3 420	5 939
Sainte-Lumine-de-Clisson	—	—	956	1 013	997
Sainte-Lumine-de-Coutais	—	—	932	954	1 015
Saint-Lyphard	—	Sant-Lifar	1 331	1 357	1 554
St-Malo-de-Guersac	Sant-Malou	—	2 207	2 247	2 461
Saint-Mars-de-Coutais	—	Sant-Meurzh-Koutez	1 235	1 231	1 266
Saint-Mars-du-Desert	—	Sant-Meurzh-an-Dezerzh	1 645	1 716	2 033
Saint-Mars-la-Jaille	Sant-Meurzh-C'hall	Lanveurzh	1 953	1 873	2 035
Saint-Même-le-Tenu	—	—	708	697	631
Saint-Michel-chef-chef	—	—	2 106	2 242	2 447
Saint-Molf	—	Sant-Molf	753	690	706
Saint-Nazaire	—	Sant-Nazer	58 286	63 289	69 251



# Enklask 1977

## C'HWI HA KELEIER AN NAONED

Ho kelaouenn e tle bezañ **KELEIER AN NAONED** ha pouezus-tre eo ho soñj diwa-benn ar gelaouenn evel m'emañ hag evel e tlefe bezañ. Lavarit deomp a wir galon petra a blij deoc'h enni ha petra a zisplij deoc'h ha klask a raimp ober hor gwellañ evit heuliañ hoc'h alioù en amzer da zont.

Dek munutenn a vo a-walc'h deoc'h evit leuniañ ar follen-mañ, a c'hellot kas goude an abretañ ar gwellañ da :

### KELEIER AN NAONED

79, Quai de la Fosse  
44000 NANTES

— C'hwi zo koumanantet da **KELEIER AN NAONED** abaoe

- 1974
- 1975
- 1976
- 1977

(Lakit ur groazig er c'harrez a zere ouzh ho respont)

— Ha plijout a ra deoc'h ?

Nann ha n'em eus ket c'hoant adkoumanantiñ.  
Setu perak :

Nann, met ret eo skoazellañ tud a youl vat a glask ober un dra bennak evit ar brezhoneg, dreist-holl e kêr an Naoned. Ne blij ket din evit an abegoù-mañ :

Ya, met ur bern rebechoù am eus da ober deoc'h :

Ya, met gwelloc'h e c'hellfe c'hoazh bezañ.  
Da skouer,

— Dale a zo bet re alies gant **KELEIER AN NAONED** e 1976 hag adarre e penn kentañ ar bloaz-mañ. Displijus-tre eo evit al lennerien.  
Ma ne vefe ket seurt diaesterioù, e plijfe deoc'h degemer ur seurt kelaouenn :

- bep tri miz
- bep daou viz
- bep miz
- div wech ar miz
- bep sizhun

— Kalz re ger eo **KELEIER AN NAONED** e keñver kelaouennoù gallek. Evit ur gelaouenn vrezhonek aozet gwelloc'h e vefec'h prest c'hwi da baeañ ur c'houmanant-bloaz :

- 25 F
- 40 F
- 50 F
- 80 F
- 100 F
- 150 F
- 200 F

— Pa zegemerit KELEIER AN NAONED,

- e lennit diouzhtu an niverenn nevez penn-da-benn
- E vraslennit an niverenn buan a-walc'h araok renkañ anezhi en un tu bennak. «bez ez eus dija kement a gelaouennoù brezhonek ! N'heller ket lenn pep tra !».
- E taolit ur sell dre vras hag a-wechoù zoken e lennit un niverenn penn-da-benn, a-wechoù ne lennit pajerñ ebet.
- Ne daolit nemet ur sell outi hag e lakit anezhi en ur c'horn gant an niverennoù all.

— Lod a gav dezho ez eus dija ur bern kelaouennoù brezhonek o tont er-maez : kelaouennoù a bolitikezh, a relijion, a lennegezh, a yezhouriezh, h.a. Ha kavout a ra deoc'h ez eus plas ivez evit ur gelaouenn evel KELEIER AN NAONED ?

- Ya, hep mar ebet
- Ya, ma vefe graet gwelloc'h
- Marteze
- Diaez eo da c'houzout
- Nann, ne gav ket din.

— Nevez 'zo ez eus bet digaset un nebeut kemmoù. Petra a soñjit diwar o fenn ?

Brasaet eo bet un nebeut ment al lizheroù.

- Mat eo
- N'int ket bras a-walc'h
- Ne oa ket ezhomm

Lamet eo bet ar stern a oa en-dro d'ar penna-doù

- Gwell a se !
- Gwelloc'h e oa araok

Brasaet eo bet ment ar gelaouenn evit tremen d'ar vent europat F4

- Ur sottoni eo
- Ne ran forzh
- Gwelloc'h eo bremañ

Kinnigoù all evit gwellaat neuz ar gelaouenn :

— Petra a soñjit eus neuz ar gelaouenn dre vras ?

- Plijus eo
- Digempenn
- Re a skeudennoù hag a dresadennoù enni
- Giz kozh
- Moulet fall, re a vioù kou-koug
- Re a vruderezh
- N'eus ket a-walc'h a vruderezh
- N'eus ket a-walc'h a luc'hskeudennoù
- Disheñvel a-walc'h eo diouz ar c'helaouennoù all.
- Bugelel eo
- Re sirius

Evezhiadennoù all war neuz ar gelaouenn

— Petra a soñjit eus ar pennadoù a gaver e-barzh KELEIER AN NAONED ?

- Plijus-tre
- Plijus a-walc'h
- Se 'zo hervez...
- Dister dre vras
- Didalvoud a-grenn

Ma hoc'h eus respontet «Dister» pe «Didalvoud», displegit petra a vefe gwelloc'h lakaat d'ho soñj :

Ma hoc'h eus respontet «plijus-tre» pe «plijus a-walc'h», displegit perak e plij deoc'h pennadoù KELEIER AN NAONED :



— Setu ur roll eus pennadoù bet embannet e-barzh KELEIER AN NAONED. Roit dezho un notenn etre 0 ha 10 dre gelc'hiañ an niver dibabet :

0 didalvoud a-grenn, arabat embann adarre seurt traoù en amzer da zont  
10 talvoudus-tre, ret eo reiñ muioc'h a lec'h c'hoazh da seurt pennadoù

Ar Vretoned hag ar ski .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Kudenn an Uilleann Pipe .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Korn ar filmoù .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	A-enep d'ar c'hreizennoù nukleel .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Tresadennoù farsus .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Geun ar Vrier .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Roit dezho o anvioù brezhonek	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Korn an arzoù-kaer : José Gua dalupe POSADA .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Buhez sevenadurel e Bro-Naoned .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	An Ikastolas .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Gerioù-kroaz .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Deuit d'an Wlpan .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Mikael Strogoff (bannoù treset) .....	0 1 2 3 4 5 6 8 9 10	Skol-Veur an Naoned .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
C'hoarioù .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Mao Tse-Tung .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Jul VERN .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Razhed, logod ha mors .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Ijinerezh ar pesked-mir en Naoned .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Liban : ur vro war he zremenvan .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Keleier .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	An Daneg .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Enklask war gelenn ar brezhoneg .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Penaos ober war-dro ur babig	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Taolioù-kaer ar soudard dilaouen .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Poltred ar miz : Doktor Sklerijenn .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Kanolioù Breizh .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Ar saverezh-listri .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Yann BART .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	N'hellomp ket tremen hep kreizennoù-nukleel .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Ar c'helaouennoù pemdeziek e Breizh .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	New-York hag ar Stadoù-Unanet .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Ar bezhin .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	War-du ar frankiz .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Concorde hag ar saverezh-nijerezed e Breizh .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Lizhiri al lennerien .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Ne lezomp ket ober ac'hannomp tachennoù-arnodiñ .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	An Dinesydd .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
Brittany Ferries .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10	Jimmy CARTER .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10
		Strad ar mor ravellet .....	0 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10

Pennadoù a seurt all a vefe mat da embann ivez diwar-benn :

- al levrioù nevez
- ar c'hoariva
- ar pladennoù
- ar sonerezh pobl, ar sonerezh folk
- kudennoù politikel
- an arz

- an douristelezh, ar beajoù
- ar boued
- hor yec'hed
- an ekonomiezh, buhez an embregerezhioù
- ar skiant

— Piv oc'h ? (respontit mar fell deoc'h)

- Paotr
- Plac'h

- Brezhoneger a-vihanik
- Desavet e-touesk Brezhonegerien met desket diwezhatoc'h ar brezhoneg evit mat
- Nevezvrezhoneger o vezañ kroget da zeskif abaoe pell
- O teskiñ ar yezh abaoe nebeut amzer

— Pe oad oc'h ?

— Ha tro hoc'h eus da gomz brezhoneg ?

- Bemdez, em ziegezh pe gant an dud a vev endro din
- Alies, da nebeutañ ur wech bep sizhun
- A-wechoù
- Morse koulz lavaret

— Peseurt micher ?

- labourer-douar
- skoliad(ez)
- studier(ez)
- micherour(ez)
- kelenner(ez)
- kenwerzhour(ez)
- mamm
- micher frank (breutaer, medisin, h.a.)
- ijinour, kalvezour (teknisian)
- implijad, den a garg
- beleg, lean(ez)
- pesketour, moraer
- soudard, archer
- war va leve
- micher all

— Daoust hag e c'hellit, c'hwi, sikour KELEIER AN NAONED en ur c'has dezhañ pennadoù ha skeudenoù war an dachenn-mañ-tachenn ?

Evezhiadennoù all



Saint-Nicolas-de-Redon	—	Sant-Nikolaz-Redon	2 356	2 568	2 763
Ste-Pazanne	Santez-Bezen	—	2 439	2 527	2 645
Saint-Père-en-Retz	Sant-Per-Raez	—	2 739	2 682	2 627
St-Philbert-de-Grand-Lieu	Sant-Filbarz	—	3 239	3 341	3 633
Ste-Reine-de-Bretagne	Santez-Renea	—	1 260	1 303	1 497
Saint-Sébastien-sur-Loire	—	Sant-Sebastian	11 830	14 159	17 326
Saint-Sulpice-des-Landes	—	Sant-Sulpis	920	824	716
Saint-Viaud	Skavbriz	—	1 488	1 508	1 359
Saint-Vincent-des-Landes	—	Sant-Visant	1 424	1 421	1 414
Sautron	—	Saotrun	1 118	1 229	2 726
Savenay	Savenneg	—	4 134	4 317	5 046
Séverac	Severeg	—	1 440	1 273	1 238
Sion-les-Mines	Hezin	—	2 283	2 039	1 786
Les Sorinières	—	—	1 821	2 194	3 149
Soudan	Solzon	—	1 839	1 831	1 884
Soulvache	—	—	634	582	502
Sucé-sur-Erdre	—	—	1 738	1 696	2 346
Teillé	—	Tilhez	1 251	1 267	1 193
Le Temple-de-Bretagne	An Templ	—	422	405	480
Thouaré-sur-Loire	—	—	1 709	1 974	2 887
Les Touches	—	—	1 306	1 326	1 359
Touvois	Tolwe	—	1 542	1 497	1 409
Trans-sur-Erdre	Trenz	—	760	710	706
Treffieux	—	—	776	700	688
Treillières	—	—	1 628	1 717	2 396
Trignac	Trinieq	—	6 917	7 076	7 253
La Turballe	—	An Turbal	2 542	2 716	2 959
Vallet	Gwaled	—	4 479	4 603	4 984
Varades	Gwarezda	—	2 565	2 741	2 882
Vay	—	—	1 293	1 219	1 099
Vertou	Gwerzou	Vertou	11 100	12 089	13 853
Vieillevigne	—	Henwini	2 788	2 892	2 793
Vigneux-de-Bretagne	Gwineol	—	2 024	2 008	2 371
Villepot	—	—	835	770	700
Vritz	—	—	956	904	843
Vue	—	—	796	772	743

## C'hoari

### Divinadell :

Piv eo ar butuner-mañ dirak e velezour ?

- 1) Ar Chaloni FALC'HUN
- 2) Fidel CASTRO
- 3) Alan STIVELL



# Krouet o deus embregerezhioù

Keloù a zo muioc'h-mui er mare-mañ eus freuzstalioù, eus labouradegoù o serrañ, eus labourerien dic'hopret, eus tud yaouank o chom dilabour e-pad mizvezhioù. N'eus nemet da sellout ouzh ar c'heleier e-barzh ar gelaouenn-mañ pe e forzh pehini evit merzout pegen diaes eo stad an traoù e Breizh hiziv. E Bro-Naoned hepken ez eus 25 000 den dilabour bremañ ha ne ya an niver-mañ nemet war greskiñ. Bep sizhun ez eus embregerezhioù all o serrañ ha tud dic'hopret. Zoken aferioù bras evel ar chanterioù DUBIGEON, bet krouet en Naoned ouzhpenn 200 vloaz a zo, a zo hiziv en arvar da vont da get evit mat.

Daoust hag-efi n'eo ket bezañ berrboell-mik neuze gouestlañ ur pennad hir da dud o deus krouet embregerezhioù nevez 'zo ha graet berzh-mat ganto ? Ne gav ket din... Evel-just ne fell ket din kontañ koñchennoù marzhus evit disoñjal kudennoù grevus-meurvet ar Vretoned er mare-mañ. N'eo ket un nebeut embregerezhioù nevez krouet hag a ziskoulmo diouzhtu ar c'hudennoù diaes a-vremañ. Koulskoude e kav din ez eus amañ skouerioù evidomp holl. Bez ez eus re alies gant ar Vretoned perzhioù ur bobl suj, ur bobl faezhet ha trevadennet. Kavout a ra da galz tud n'eus netra d'ober e Breizh, nemet mont da labourat dindan ar Stad, er P.T.T., er bolis, er verdeadurezh, er melestradur, en deskadurezh, da lavarout eo en implijoù sur, n'eus ket da gemer intrudu na riskloù enno. Servijourien ar Stad c'hall e vez kalz Vretoned, pezh na vir ket ouzh lod anezho da vagañ mennozioù dispa-

c'hel, er c'hontrol. Ken arouezius eo emzalc'h al labourerien-douar. A vare da vare ez eus ganto barroù-kounnar spontus ha prest int da derriñ pep tra ha nebeut amzer goude en em zalc'hont evel sujidi sentus hag e vouezhiont holl en dilennadegoù evit ar re o deus touellet anezho meur a wech dija gant promesaoù kaer. Arouezioù an trevadennerezh eo an emzalc'hoù-mañ.

N'eo ket techet ar Vretoned da grouiñ embregerezhioù en abeg d'eo stad a dud trevadennet, ha na gredont ket enno o-unan. Bez ez eus ivez muioc'h-mui er gevredigezh un aergelc'h kontrol e Breizh evel e Bro-C'hall. Ar stourm a-enep d'ar gevalaouriezh (kapitalism) a zo deuet da vezañ lugan bras ar sindikadoù, an ilizoù, ar strolladoù politikel, al luskadoù sevenadurel hag an emsav breizhat a-bezh. Ar gevalaouriezh a zo gwriennet kement droug a zo er gevredigezh. Ar batroned dre vras a vez sellet outo muioc'h-mui evel tud fallakr, korvoe rien, sunerien-wad pe dost... En deizioù-mañ paz eus kalz labouradegoù o serrañ e vez sellet ouzh ar batroned a ra freuzstal evel tud dic'houest ha beulkeed, pa ne rebecher ket outo bezañ lakaet o gwenneien a gostez (e Bro-Suis da skouer) ha bezañ lezet o afer da gouezhañ evit en em zisober diouzh o micherourien. Ar batroned a ra berzh-mat, a zle bezañ int laeron hep mar ebet ha berzh a reont diwar-goust al labourerien hag hini ar Stad. Ur ger-hud a vez implijet gant an holl, ar ger sokialouriezh, met den ne oar ervat eus peseurt sokialouriezh ez eus anv. Daoust

hag ez eus anv da stadelaat pep tra e Breizh, da lavarout eo da lakaat kement obererezh e krabanoù ar Stad C'hall sokialour ? Daoust hag ez eo ar sokialouriezh an emvererezh e pep lec'h, er rannvroioù, en embregerezhioù, er skol ? Den ne oar mat...

Moarvat em bo lakaet tud 'zo da skrignal gant al linennoù-mañ met me gav din ez eo a-bouez prederiañ war an holl gudennoù-mañ ha sklaeraat an traoù. Emañ an tu kleiz o paouez kemer ar galloud en ur bern kêrioù bras e Breizh : an Naoned, Roazhon, Brest, Sant-Hermelen, Ourvez, h.a... Gant strolladoù an tu kleiz gall e yelo moarvat ar maout en dilennadegoù ar bloaz a zeu. Ret mat e vo d'an holl sellout ouzh an traoù evel mæz int ha paouez da welout an armerzh hag ar gevredigezh e gwenn ha du, diwar glichedoù eus an naontekvet kantved, gant tud jentil diouzh un tu ha tud fallakr diouzh un tu all.

Gwir eo ez eus patroned a zo preizherien, tud a gav dezho e c'hellont ober gant o gopridi evel ma reont gant o ardivinkoù, kemer anezho ha stlepel anezho kuit pa blij dezho, tud a gav dezho e c'hellont divizout pep tra o-unan-penn hep goulenn morse ali ar re a labour ganto, tud a gav dezho n'eo o gounid nemet frouezh o c'hevalla ha neket frouezh al labour, tud ha na soñjont nemet en arc'hant ha n'o deus ket mezha da vevañ war an ton bras tra ma rank o micherourien krakveañ gant goprou izel-tre, patroned hag a gav dezho e c'hellont stlepel kuit dileuridi ar sindikadoù e-lec'h divizout ganto, patroned a gav dezho zoken e



c'hellont «preañ» anezho... N'eo ket an holl batroned evel-se avat, daoust ma c'houzañv an holl hiziv da heul seurt gwallskouerioù ha da heul dreist-holl korvoidigezh spon-tus ar vicherourien en amzer dremenet pa ne oa ket sindikadoù kreñv evit o difenn.




N'eo ket gouenn ar batroned ur ouenn villiget. Bez ez eus patroned hag a zo bountet da gentañ gant ar c'honat-krouiñ, tud hag a zo ganto ur bersonelezh a ziforc'h ha n'o deus ket c'hoant labourat dindan dud all, tud kalonek hag a zo prest da gemer riskloù bras, tud strivant gouest da labourat tri-ugent pe bevar-ugent eurvezh pep sizhun tra ma c'hell an darn vrasañ eus ar gopridi soñjal e traoù all pa vo echu o daou-ugent eurvezh labour... Ar re a grou embregerezhioù n'int ket peurliesañ bourc'hizien, tud pinvidik tud desket bras. An darn vrasañ anezho a zo artisaned bihan, micherourien pe galvezourien (teknisianed). Ezhomm a zo eus krouerien bepred en ur gevredigezh a ya war-raok hag hi kevalaour pe sokialour. An hevelep doare tud eo a gaver e penn an embregerezhioù (krouet ganto, rak n'eo ket gwir ken evit an hêred), e penn ar strolladoù politikel, e penn ar sindikadoù. Daoust da bezh a c'heller rebech outañ hiziv en deus graet ur paotr evel Aleksis GOURVENNEC kalz muioc'h evit Breizh eget kalz tud all, hag en ur vro sokialour e vije deuet

moarvat ivez da vezañ ur penn bras. Ezhomm ez eus eus krouerien-implijoù, krouerien-binvidigezhioù, ha direizh eo flatrañ an holl batroned dre vras evel tud noazus rak kalonekoc'h eo bezañ patron hiziv eget bezañ kelenner pe den a garg er melestradur gall.

Anavezout a ran daou vreur, unan anezho a zo aet da labourat en EDF hag ur plas mat en deus hiziv en ur burev e Paris. Gopret mat eo ha n'en deus ket d'en em chalañ evit an amzer da zont. A-benn un nebeut bloavezhioù e c'hello mont war e leve ha distreiñ da Vreizh. E vreur a zo bet kalonekoc'h pe sotoc'h. Krouet en deus un embregerezh bihan e-kichen an Oriant hag implijout a ra ur pemzek den bennak hiziv. Labourat a ra div wech muioc'h eget e vreur, ne gemer ket vakañsoù koulz lavaret, prederiet e vez deiz ha noz gant buhez e embregerezh, ne oar ket bep miz hag-eñ e vo labour er miz da zont met gouzout a ra mat petra e teuio da vezañ ma ra freuzstal e afer evel kalz re all er c'horn-bro dija. Ne gavo plas ebet d'e oad ha koulskoude en deus bugale c'hoazh war o studioù. N'en deus ket lakaet kalz arc'hant a-gostez ha ma c'hoarvez gantañ ober freuzstal e oar e c'hello ar bankoù kemer kement tra en deus : e garr, e di, h.a... N'eo ket ur paotr fall gant e vicherourien nemet e teu a-wechoù komzoù garv gantañ. Sellet e vez koulskoude evel ur «c'hozh-patron» gant lod eus an dud, dreist-holl ar re yaouank. Tu a zo d'en em c'houlenn pehini eus an daou vreur-mañ en deus dibabet an hent mat...

Kement-mañ n'eo ket ur vojenn dennet eus Buhez ar Sent, fedoù gwirion ne lavaran ket ha tu a vefe da reiñ miliadoù a skouerioù a seurt-mañ e Breizh. Tud 'zo o deus kavet gwell mont da Baris pe gemer plasoù mat er melestradur met ar re all a zo chomet da stourm evit krouiñ implijoù ha pinvidigezhioù er vro a vez sellet outo evel torfedourien. Hepto avat ne vefe mui Breizh nemet un dezerzh, er-maez eus un nebeut labouradegoù bras renet gant kevredadoù kevalaour gwirion evel CITROEN, I.T.T., h.a... En ur Vreizh solialour e vo ezhomm eus krouerien embregerezhioù ivez ha zoken muioc'h c'hoazh eget hiziv.

Berboell e c'hell seblantout ivez komz eus krouiñ embregerezhioù e Breizh paz eo ken dizingal ar stourm. Penaos e c'hellfe embregerien vreizhat, hag al labourerien-douar ivez, derc'hel penn paz eo ken uhel priz an tredan evito, ken ker an dezougadurioù dre dren, ken fall an hentoù en hor bro, ken gwan stad hon armerzh dre vras. Touellus e vefe lezel ar Vretoned da grediñ n'o deus nemet da labourat ha strivañ muioc'h evit diorren o bro-ret eo ivez stourm evit diskar skoilhoù kevredigezhel ha politikel-met ken touellus eo lezel anezho da grediñ n'eus netra d'ober e Breizh war dachenn an armerzh keit ha ma ne vo ket Breizh dieub ha sokialour. Ur c'helc'h-bac'h eo : ur bobl suj a zo ur bobl digalon, distank enni ar grouerien hag an embregerien. Ret eo kemman ar sternioù kevredigezhel ha politikel met ret eo deomp ivez kemman hor speredoù. An nebeut skouerioù-mañ a c'hello reiñ



nerzh-kalon d'an holl re hag en em c'houlenn hag-efñ ez eus tu d'ober un dra bennak e Breizh hiziv.

### «BREIZH DILOJADENNOU»

Ker ha gorrek eo an hent-houarn evit kas marc'hadourezhioù graet e Breizh war-du Bro-C'hall ha peurrest Europa. Setu perak ez eus bet krouet ur bern aferioù-dezougezh e Breizh : DROUIN, PROST, L'HARIDON, MELEDO, ha kalz re all... Gant o c'hirri-samm e vez kaset bemdez legumaj, pesked, kig, boestou-mir, ha gwispid war-du broioù all. An afer brasañ e Breizh a zo hep mar ebet an ti DROUIN, bet krouet en Naoned gant Jarl DROUIN, ur miliner, e 1912. Implijout a ra hiziv ouzhpenn 1 600 den !

E 1963, ur paotr hag a labourer e ti DROUIN abaoe pevarzek vloaz, an Ao. VERGER, a zivizas mont kuit ha krouiñ e afer dezhañ e-unan, a anvas «BRETAGNE DEMENAGEMENTS» (Breizh Dilojadennoù). Ne oa ket gwall binvidik met esperniet en doa war e c'hoproù e-pad bloavezhioù ha gouest e voe da brenañ ur c'harr-samm kozh. Gant daou baotr all e krogas d'ober dilojadennoù (pe diannezadurioù ma kavit gwell). Anavezout a rae mat ar vicher rak kement-mañ a oa unan eus obererezhioù an ti DROUIN e-touez re all : dezougadur marc'hadourezhioù, dezougadur beajourien, beajoù touristel, h.a.... N'eo ket ur vicher aes : ret eo dastum ha pakañ gant kalz evezh arrebeuri hag ur bern traezoù a bep seurt e tiez tud prevez araok kas anezho betek un ti all. N'eo ket aes diskenn ha pignat an diri gant pikol pezhioù arrebeuri pounner, tra ma c'hell laeron en em silañ e-barzh ar c'harr-samm chomet war ar straed. Arabat terriñ na freuzañ netra met arabat kennebeut koll amzer rak ne vezer ket paeet diouzh an amzer... Berzh-mat a reas koulskoude an Ao. VERGER ha dont a reas a-benn da brenañ ur c'harr-samm nevez ar bloaz war-lerc'h.

Hiziv e ro BRETAGNE DEMENAGEMENTS labour da 50 den hag ober a ra ar c'hevredad gant 20 karr-samm. Deuet eo da vezañ an afer-dilojadennoù kentañ e Breizh gant 3 000 dilojadenn bep vloaz (tra ma ra DROUIN ha POLLONO ur 1 200 bennak anezho

pep hini). Bep vloaz e pren ur c'harr-samm nevez hag e kresk niver an dud implijet gant ar c'hevredad. Deuet eo ivez a-benn da vezañ hiziv an afer mirerezh-arrebeuri kentañ e Breizh. E tachenn c'hreantel Kerc'hfaou ez eus ur savadur bras (8 000 m<sup>2</sup>) ennañ miliadoù a bezhioù arrebeuri yenaet da 10° a-hed ar bloaz, diwallet gant kaelioù tredanaet, eveshaet noz ha deiz gant gwarded ha chas maouter alaman. Kalz dilojadennoù a ra ar c'hevredad e Breizh met ivez e korn-bro Paris ha zoken betek an lzelvroioù...

### EOG MOGEDET E BRO-GERNEV

Ganet e voe Fañch CAILLAREC er Faoued e 1905. N'en devoe ket ar chañs da chom pell er skol ha ret e voe dezhañ mont da Baris da c'hounit e vara e 1918.

Micheroù a bep seurt a voe eno gantañ ha labourat a reas dalc'hmat evit tud all betek dibenn an eil brezel-bed. E 1945 e krouas un afer vihan a werzhe dafar hag ardivinkoù evit an tiez-debriñ, ar c'higerezhioù hag ar pastezezhioù. E 1957 e tivizas oberiañ e-unan ardivinkoù evit an ijinerezhioù magadurel. Krouiñ a reas neuze un afer nevez, CAPIC hec'h anv. Bez ez eus hiziv 200 den o labourat er c'hevredamañ !

N'en doa ket disoñjet bro e gavell, avat, hag e 1972 ez adkemerias un afer vihan a rae kilhevardon hag a oa o paouez ober freuzstal e Kador, etre Rosporden ha Konk-Kernev. Dre ma veze oberiet ardivinkoù-mogediñ en e labouradeg e Paris, e tivizas ober eog mogedet e Kador dindan an anv-merk ARMORIC. Kregiñ a reas gant pevar den ha mogedet e voe ganto 50 tonenn eog e-pad ar bloavezh kentañ. Gwerzhet e voent dre bellgomz d'an ostalerioù ha d'ar varc'hadourien-besked e Breizh hep ken. E 1973, e oa dek micherour e Kador hag e voe mogedet ganto 100 tonenn eog. Ar gwerzhioù a dremenias eus 1,78 milion a lurioù gall e 1972 da 6,30 e 1973. Abaoe n'en deus graet an afer nemet kreskiñ :

1974 : 300 tonenn	9 640 000 F
1975 : 600 tonenn	13 000 000 F
1976 : 900 tonenn	20 000 000 F

Ar c'hevredad-mañ a ro labour hiziv da 83 micherour. Gwerzhañ a ra an eog-mañ e Breizh met ivez dreist-holl en diavaez, pell-tre a-wechoù, d'ar stalioù bras INNO e Belgia, CASINO e Bro-C'hall, d'an ispiserezhioù fin e Paris, da gevredad ar «Wagons-Lits» (bagonoù-gweleoù), h.a. Ar souezhusañ-holl eo orin an eog. Ne zeu ket, evel ma soñjit marteze, eus an Aven nag eus ar Skorv, eus tu all ar voull-douar ne lavaran ket, eus arvor amerikan ar Meurvor Habask. Evit degemer ha mirout an eog-mañ ez eus bet savet kembreier yen bras-tre (3 800 m<sup>3</sup>) e Kador. Emañ Fañch CAILLAREC o paouez ijinañ ur pastez-eog hag ur soubenn-eog a zo krog d'ober berzh-mat ivez war ar marc'had. 72 vloaz eo bremañ ar paotr souezhus-mañ met kenderc'hel a ra da labourat 90 eurvezh bep sizhun !

(Notenn : n'eo ket ARMORIC an afer gentañ e Breizh evit an eog. Bez ez eus unan all pouezusoc'h c'hoazh e Poullaouen «SAUMON P.C.» renet gant an Ao. CHEVANCE).

### «ETIVI» A-VORDILH E SANT-TUDAL

E Sant-Tudal (556 annezad), etre Gourin hag ar Gemene, e-kreiz ar Menezioù Du, ez ae kuit ar re yaouank hag e oa ar boblañs o koshaat hag o tigrskiñ. Tonket e oa ar vro da vervel evel an darn vrasañ eus ar parrezioù er c'horn paour-se. Ha koulskoude setu hiziv ar spi o tont en-dro er vro en abeg da ziv labouradeg bet krouet gant daou zen eus ar vro, an Ao. JAFFRELO hag an Ao. REVOLT. Kroget o deus int o-daou evel artizanet bihan met berzh-mat o deus graet hag a-drugarez dezho e eus hiziv div labouradeg a ro labour da 80 den e Sant-Tudal. N'eus ket mui tud dilabour er barrez ha ne gomz ket mui ar re yaouank a zivroañ.

An Ao. REVOLT a ra gwestell breizhek hag a werzh anezho pell diouzh Sant-Tudal. Deuet eo anv ar barrez da vezañ brudet en diavaez en abeg d'an traoù mat a vez graet enni. En trimizvezh diwezhañ eus ar bloaz e c'hellfe an 30 den a labour gant an Ao. REVOLT bezañ kamm-gemeret evit keuneutaerien pe gilvizien. N'eus mui kaoz ganto



nemet eus etivi, etivi gant kafe, etivi gant chokolad, gant «Grand Marnier», gant pralin, gant vanilla... da lavarout eo «etivi Nedeleg» a vez debret en tiegezhioù da zeiz Nedeleg ha da zeiz diwezhañ ar bloaz. E dibenn 1976 ez eus bet evel-se 120 000 etev o kuitaat Sant-Tudal evit mont war-du peurrest Breizh ha war-du Bro-C'hall...

## BINVIU-SENIN GWERZHET DRE AR BED A-BEZH

E 1971 e oa Gérard GARNIER, studier war al lizhiri met ne soñje nemet en un dra e gwirionez, er sonerezh indian eus Su-Amerika. Gant mignoned en doa krouet ul laz-seniñ «LOS KOYAS» evit seniñ tonioù kaer ha trist an Andez. Abalamour ma ne gave ket binvioù-seniñ a-zoare e Breizh e stagas da oberiañ e vinvioù-seniñ e-unan war skouer binvioù degaset eus Bolivia ha Perou. Binvioù a reas goude evit mignoned hag evit tud all ivez ha kement berzh a reas, ma reas e soñj en em staliañ e Dinan evel artizan, kentoc'h eget mont da vezañ kelenner.

E vreur henañ, Joël, a oa bet martolod er verdeadurezh-kenwerzh e-pad 5 bloavezh araok mont da labourat evel beajour-kenwerzh en ti SINGER o werzhañ gwirierzed. Dre ma oa ur paotr strivant ha speredek e pignas tamm-ha-tamm. Fiziet e voe ennañ ar garg stummañ gwerzhourien an Ti SINGER e Bro-C'hall, ha, da c'houde, e voe anvet da skoazeller er servijoù-gwerzhataerezh («marketing»). Goude eizh bloaz e Ti SINGER, e oa aet skuizh, hag e wreg ivez, gant ar vuhez e Paris. Evit tec'hout diouzh ar gêr vras a vare da vare, o doa prenet un ti-feurm kozh e Muzel (Mouzeil), ur gumun bihan war-dro 30 km er biz eus an Naoned, gant ar soñj d'e kempenn ha d'e lakaat a-ratre e-pad o vakañsoù.

Divizout a reas an daou vreur hag ur mignon all krouiñ a-gevret ur c'hevredad bihan evit oberiañ binvioù-seniñ. Gérard hag e vignon soner eveltañ a rafe war-dro an oberiadurezh, Joël war-dro ar gwerzh hag e wreg war-dro ar sekretourva. Krouet e voe ar c'hevredad CAMAC (krouidigezhioù, arz, sonerezh, traezoù da ginnig) d'ar 1añ a viz Mezheven 1972 ha kregiñ a reont d'oberiañ

fleütoù indian e Muzel : *kenas, tarkas, anatas, anatitis, pinkillos*, h.a... Gwerzh et vezent d'ar stalioù sonerezh dre Vro-C'hall. Giz ar sonerezh su-amerikat a oa o tremen e Bro-C'hall, avat, ha rediet e voent da glask klianted pelloc'h. Evel-se e krogas ar c'hevredad da ezporzhiañ abred-tre.

Abaoe derou ar bloavezhioù 70 e oa giz ar sonerezh keltiek o kreskiñ muioc'h-mui e Breizh hag en diavaez, dreist-holl dindan levezon Alan STIVELL. Klask a reas Gérard GARNIER oberiañ bombardoù met disheñvel-tre e oa ober gant gourraoskl (bambouz) hag ober gant ebena. Bez e oa un nebeut luderien e Breizh a rae bombardoù en un doare artizanel evel Dorig LE VOYER, CAPITAINE pe LAURENCEAU met gwarezet mat e oa o sekredoù. Ouzhpenn-se e labourent goustadik-tre, evel 'arzourien pe dost, ha ne raent nemet un nebeut kantadoù a vinvioù-seniñ bep vloaz, tra ma felle d'ar C'HAMAC oberiañ bombardoù en un doare greantel (ijinerezhel). Dont a reas a-benn memestra daoust ma ne voe ket dreist ar skouerennoù kentañ. En hañv 1973 e prefont ur venvegijinenn gentañ, un turgn hanter-emgefreek (koust : 70 000,00 F) ha setu da heul miliadoù ha miliadoù a vombardoù o tont er-maez eus labouradeg Muzel. Fae a vez graet hiziv c'hoazh gant sonerien 'zo e Breizh war ar binvioù-seniñ-se met snobezh eo dreist-holl. Marc'had-matoc'h int eget ar re all hag a-drugarez dezho e c'hell miliadoù a dud yaouank deskiñ da seniñ bombard, pa ne vije ket bet gouest a-hend all an artizaned da walc'hañ ar goulen... Emañ ar c'hevredad CAMAC o peuraozañ patrom ur biniou a vo oberiet ivez a viliadoù e 1977-1978 (ha da c'hortoz e vez enporzhiet ha gwerzh gant CAMAC biniawoù marc'had-mat degaset eus Pakistan !).

E 1974 e voe roet lañs d'un trede rumm binvioù-seniñ, ar fleütoù Pan. 1 500 anezho a zeu er-maez pep miz eus labouradeg Muzel hag a vez ezporzhiet dre ar bed a-bezh.

E 1975 e teuas binvioù-seniñ gant kerdin war wel evit ar wech kentañ e Muzel : psalterionoù, Spinetezed ar Vogesen («*épinettes*

*des Vosges*») ha dulsimered, benveg-seniñ folk bet brudet gant Bob DYLAN. Diaes e voe er penn kentañ ha ret e voe d'ar vreudeur GARNIER mont d'ar Stadoù-Unanet evit gwelout penaos e veze oberiet an dulsimered du-hont. Lorc'h a zo enno hiziv abalamour ma ezporzhiont ul lodenn vras eus o c'henderc'h dres war-du ar Stadoù-Unanet, bro-orin an dulsimer.

Bremañ e krog ar c'hevredad d'oberiañ telennoù keltiek gant skoazell galvezel Gildas JAFFRENNOU, mab-bihan TALDIR (hag en deus graet telennoù diniver abaoe tregont vloaz m'emañ o vevañ e Bro-Saoz). An telennoù-mañ a vez



gwerzh et «*kit*» (evel binvioù-seniñ all ivez), da lavarout eo e tammoùigoù a zo da vezañ strollet gant ar prener e-unan. Marc'had-matoc'h eo eta priz-koustañ ha priz-gwerzhañ ar binvioù-seniñ hag ar blijadur en deus ar soner da vezañ aozet e delenn pe e zulsimer e-unan. Gant skoazell Gildas JAFFRENNOU c'hoazh emaint o studiañ oberiadur bielloù e Muzel.

Gérard, ar soner, a ra bepred war-dro ar c'henderc'h ha klask a ra dalc'hmat binvioù-seniñ nevez da oberiañ evit ledanaat obererezhioù ar c'hevredad. Joël a ra war-dro ar mererezh hag ar gwerzhioù ha mont a ra d'ar foarou etrevroadel bras da ginnig binvioù-seniñ ar C'HAMAC, e Brussel, Paris, Frankfurt... Krouet o deus 50 implij e Muzel (700 annezad), ur gêriadenn hag a oa o koll he yaouankiz...

## Yann BART (kendalc'h)

### VI

Goude an taol-skrap-se, goude ar gentel-se roet d'ar Saozon e berr amzer, Yann BART a ziblasas evel ma hon eus lavaret, da vont d'ar mor bras gant e lestrig Sant-Loeiz ha lestr bras ar c'homodor deut da vezañ e Breizh. Al lestr saoz all o lezas da vont ac'hano hep lavaret ger. Kredapl e kave oa brav dezhañ ma hen lezed eno da vouzhat.

Pa voent aet larg war ar mor don, Yann BART a lavaras d'e vartolod :

— *Kerc'hit ar c'homodor amñ ma vezo barnet hag e tastumas e holl ofiserien en-dro dezhañ.*

Ar c'homodor, ouzhpenn ma oa trubard, a oa ivez digalon. Kollet en doa e benn, gant e strafuilh. Kavet e voe en e gambrig, liv ar marv warnañ. Hanter varv oa gant e enkreuz ; e zent a strakle en e benn, ha ne c'halle ket lavaret div gomz war eeun. Ne oa ket gouest da vale, hag e voe ret e zougen pe e dreinañ d'al lezvarn.

Yann BART a c'houlennas neuze digant e ofiserien petra soñjent eus ar c'habiten saoz. Holl a-unvouezh e tisklerjont oa un trubard, un treitour eus ar re washañ, hag e tlee bezañ barnet d'ar marv. Ar c'habiten a reas neuze skrivañ ur setañs, hag a c'hourc'hemennas da Robert e lenn a vouezh uhel d'an torfedour.

Ar c'homodor a grede ivez ker mat ez ae da goll e vuhez, ma na c'helle mui en em zerc'hel war e izili. Ret e voe da zaou vartolod e zerc'hel e-pad ma lenned ar setañs.


Setu amañ ar setañs-se :

*«Ar c'habiten BART, dre anaoudegezh vat e-keñver ar c'homodor PHILIPS evit an dijuniñ c'hwek en deus graet ouzh e daol er mintin-mañ, her ped d'e dro da zont da leinañ gantañ war al lestr Sant-Loeiz».*

Ha setu penaos en em veñje ar martolod kalonek-se.

Amañ ec'h echu ar pennad-istor am eus lakaet e brezhoneg. Ne c'hallan ket miret koulskoude da verkañ c'hoazh unan eus a daolioù-kaer Yann BART.

Loiez Pevarzek a oa neuze Roue e Frañs, hag ar brud eus a vartolod bras Dukark a oa aet betek ennañ. Ne gomzed e lez ar Roue nemet eus a daolioù-kaer Leon ar Mor. Yann BART a voe kemennet dezhañ da gomz ouzh ar Roue. Ar martolod a vije bet gwelloc'h gantañ ober ur c'hrogad ouzh ur c'homodor bennak, evit mont d'en em lakaat a renk gant an dud a lez, prifsed holl, pe da vihanañ tud a lignez uhel, tud







seven, boas da vezañ kinklet ha fichet kaer. Ne gave ket aes bale war bleñch koaret pe balennoù. Hogen ar Roue a c'hourc'hemenne ha ret oa sentiñ.

Setu eta Yann BART o lakaat ober un dilhad nevez hag o vont da lez ar Roue. Loeiz Pevarzek en digemeras evel ur priñs. Ar Roue a oa en ur sal vras hag ur vandenn tud a lez en-dro dezhañ. Goude bezañ kaozeet ur pennad gant ar martolod dispar, e c'houlennas outañ penaos en doa graet evit tremen gant ul lestrig bihan, dre greiz ur vandenn listri-brezel Saoz hag Holland, hag o c'hannañ holl dre ma tremene e-biv dezho.

— *Penaos, em eus graet, va Roue ? eme Yann BART ; gortozit, me ya da ziskouez deoc'h.*

Neuze e pedas an dud a lez a oa eno, kañfarded goloet holl a fanfarluchoù, rubaned, dantelezhed ; o fedas d'en em lakaat war ziv renk, eus an eil penn d'egile eus ar sal, o lezel ur waks moan etre an div

renk. Pa en doa renket evel-se e dud diouzh e c'hiz, ez eas d'ar penn izelañ eus ar sal, e-pad ma edo ar Roue er penn uhelañ war un tron. Neuze o teurel e dog d'an douar, hag o kroaziañ e zivrec'h, ez a a-benn-kaer dra ar wask a oa etre an div renk, en ur reif, a zehou hag a gleiz, taol skoaz da bep hini, hag en ur momed en em gavas e-kichen treid ar Roue, diskaret gantañ an holl dud a lez, ur renkad a bep tu, holl war gwenn o c'hroc'hen.

— *Setu aze, va Roue, eme Yann BART, penaos a ris d'al listri saoz hag holland.*

— *Ne oufed ket diskouez sklaeroc'h, eme ar Roue.*

Ha Loeiz Pevarzek a reas neuze un abadenn c'hoarziñ eus ar seurt ne reas ket marteze alies. Hogen an dud a lez a c'hoarzh melen, hag holl o doa debron un tu bennak ; ha goude-se, pa veze anv el lez eus ar «bleiz-mor», unan bennak a save atav c'hoant skrabat gantañ.

**Goulven MORVAN**

all (Welsh Nation, Scots Independent, Ireland, Irish News, Yr Baner Kernewek ...) hag ivez eus broioù bihan all. Ur bern levrioù a c'heller kavout ivez diwar-benn Breizh hag ar broioù keltiek all, dreist-holl diwar-benn Kembre a-drugarez da vrokusted tud Kêrdiz hag o deus kinniget da GSKBN ur bern levrioù kembraek ha levrioù saoznek diwar-benn Kembre. Azezennoù mat a zo ha pep hini a c'hell dont eno evit lenn e-pad ur pennad, evit amprestañ levrioù, evit goulenn diskleriadurioù war an dra-mañ-tra

pe c'hoazh evit kejañ gant tud all hepken...

### PEMZEKTEZ KELTIEK AN NAONED

Evit an deirvet gwech e vo aozet gouelioù bras en Naoned eus an 10 d'ar 24 a viz Mezheven : PEMZEKTEZ KELTIEK AN NAONED. Kregiñ a raio ar gouelioù-mañ gant ur veilhadek iwerzhonat d'ar gwener 10 da noz hag echuiñ d'ar 24 a viz Mezheven gant Gouel Sant Yann e Kastell an Duged. E-pad an

div sizhunvezh-mañ e vo kinniget d'an Naonediz a bep seurt abadennoù : c'hoariva, korolladegoù, telenadegoù, sonadegoù gant lazoù-kanañ ha lazoù-seniñ, filmoù, beilha-degoù liesseurt, h.a... Skosiz, Kembreiz hag Iwerzhoniz a gemero perzh er gouelioù-mañ met dreist-holl e vo diskouezet drezo pegen buhezek eo sevenadur-pobl Vreizh e Bro-Naoned. Muioc'h a ditouroù diwar o fenn a vo roet en niverennoù da zont.



## BUHEZ SEVENADUREL E BRO-NAONED

### MEURZH

- 5 Fest-noz en Abbaraez  
Fest-noz en Endr-lzel  
Fest-noz e Porniched
- 6 Arnodennoù evit prientiñ  
KAN AR BOBL
- 12 Fest-noz en Endr-lzel gant an Endreziz
- 13 Gouel poblek gant Kelc'h Keltiek an Naoned, ar bagad Jili Ræz, An Endreziz ha Kelc'h Keltiek Endr-lzel
- 14 Emvod-labour en Naoned diwar-benn raktres ur skolvamm vrezhonek en Naoned
- 16 Taol-grenn en Ourvez : «Bro vrezhoneger, bro c'hallo, Bro-Naoned» (Kelc'h Keltiek Ourvez)
- 17 Koan ar Vrezhonegerien en Naoned
- 18 Abadenn ganaouennoù gant Alain ALLANIC e Reze (Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur)  
Abadenn luc'hvanoù gant Félix LE GARREC «Vivre en Bretagne» (bevañ e Breizh) e Sant-Hermelen
- 19/20 Dibenn-sizhun brezhoneg e Gwerann (KSIB ha Skol An Emsav)

- 20 Fest-noz e Lusanjer gant Claude BESSON ha Les Brindeurs de l'Etang
- 24ha Korolladeg vreizhek er strae
- 27 doù e kreiz-kêr an Naoned da geñver gouelioù an Hantter-Goraiz
- 26 Fest-noz gant an Endreziz e kreizenn gevredigezhel Talar Breizh, e Sant-Hermelen
- 27 Bodadeg-vloaz ar gevredigezh Bretagne Vivante  
*Breizh Vev* e Le Pé de Buzay

### EBREL

- 2 Fest-noz e Derwal
- 4/8 Devezhioù-studi e Kastell-Brient diwar-benn an dañsoù e Bro ar Me (Kendalc'h)
- 5/19 Ugent bugel eus Ramsey

- 11 (Enez Vanav) degemeret gant tiegezhioù eus Sant-Brewen (kêr gevellet gant Ramsey abaoe ar bloaz tremenet)
- 11 (Lun Fask). Korolladeg vreizhek e Teillé (Kelc'h Keltiek Teillé)
- 13 Bodadeg an holl 'gelc'hioù keltiek eus an Naoned e Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur e Reze
- 15 Sonadeg en iliz Sant Nikolaz en Naoned (*La Camerata de Paris*)
- 16 Fest-noz e Machikoul gant an Endreziz (*Bretagne Vivante*)
- 16/17 Dibenn-sizhun brezhoneg e Gwerann (KSIB ha Skol an Emsav)
- 20 Taol-grenn en Ourvez : «Kreizennoù atomek, endro ekologiezh» (Kelc'h Keltiek Ourvez)
- 21 Koan ar Vrezhonegerien en Naoned
- 23 Fest-noz an Unvaniezh e Sant-Nazer
- 24 Kerzhadeg an Unvaniezh e Sant-Nazer





# Noter kentañ Loperereg : Fañch Rolland

Loperereg : ur barrez vras eo, tost da Bont-ar-Veuzenn hag e vilin-boultr. Tost da hent-bras Kemper-Brest ivez, ha da lenn-vor Brest (aes eo dilestrañ er Faou, pe tre Landevenneg ha Meilh-ar-Vern...).

Setu perak e oa kement a vanerioù ha kement a dud e Loperereg da fin an trivec'hevet kantved. Freuz a voe alies e-pad an Dispac'h. Ar vilin-boultr a voe meur a wech bec'h warni. En em guzhat e-kreiz koadoù ar vro n'edo ket diaes. E 1795, ur miliad chouaned a dapas krog en tost da zek tonennad poultr, a daolas ur guchenn en dour, hag a gasas ganto pezh ma c'hellfont etrezek Keberen, dre Gastellin, Sant-Segal, Brieg...

Evit an darn vrasañ eus Loperereg n'edo ket ar frankiz eus tu Paris, met en o zouez e savas meur a hini evel an den-mañ emañ o vont da gomz diwar-e-benn.

\*  
\* \*

Pa grogas an Dispac'h e 1789 e oa Fañch ROLLAND daou vloaz warn-ugent. Ganet e oa e Kervinig (Loperereg) ha studiet en doa e skol vihan ar bourk.

Mont a reas war-lerc'h mistri nevez Bro-C'hall. Gwellañ ma c'hellas e sikouras anezho. E c'hobr ? ur plas noter krouet evitañ...

Setu ma krogas da renablñ ha da brizachañ madoù, tiegezhioù, arrebeuri an dud kaset en toullbac'h pe aet da glask repu e Bro-Saoz. Gwerzhañ a reas, da skouer, er bloavezh 1794, maner JJ de Villiers de L'Isle-Adam.

Daoust dezhañ da vezañ Komiser ar Gouarnamant, ne ankounac'has ket e c'hodelloù. Enno e lakaas kuchennadoù arc'hant skrapet diwar ar peadra ma werzhe. Klask a reas un ti bras ha kaer da vont da vevañ ennañ.

Mistri maner Nivot ne deüent ket war-dro o zi abaoe pell oa : e-barzh ez eas da chom, eñ hag e vaouez, er bloavezh 1802. Met dav e voe dezhañ da gentañ teurel tud er-maez : ar c'houer, Kevareg e anv, hag a laboure an douar tro-war-dro en doa kavet brav kemer plas ar vistri, aet da get a gave dezhañ... Koulskoude n'edo ket an noter mestr ar maner. Ne brenas anezhañ nemet bloaz goude pa fellas d'an Itron Daisy rivinet hen gwerzhañ.

\*  
\* \*

Eus eno ez a d'ar bodagedoù ha d'ar foarioù. Yezh ar beizanted a c'hoar mat ha plijout a ra dezhañ kavout afer outo. Met gwidreüs e-giz ma'z eo, ne vez ket pell o pakat hini pe hini en e rouedoù. Meur a hini sikouret gantañ da gentañ (prestañ arc'hant a rae a-wechoù) a zo bet gwasket gantañ goude, betek bezañ rediet da werzhañ e zouar, «goude an eost e roit ar gont din !» a lavare dezho. Ya ! ha ma vank ur gwenneg ne vez ket pell oc'h astenn e grabanoù war an tiegezh ! Gwashoc'h c'hoazh a c'hoarveze d'an hini a enebe outañ, ken aes eo dezhañ dont a-benn eus nep a gar !

Brasoc'h-brasañ e teu da vezañ pinvidigezh an noter. Met ar bern droukañs ha kasoni a gresk ken buan war-dro dezhañ...

\*  
\* \*

1816 : nav bloaz ha daou ugent eo. Pinvidik eo, pinvidik bras. War nav farrez en deus douaroù hag atantoù.

Kevareg, an hini kaset er-maez eus ar maner pevarzek vloaz 'zo a zo o chom abaoe er Bavedoù, pemp

kant metr pelloc'h. Gantañ emañ e vaouez hag e zaou vab : Per ha Youenn. Enno holl eo savet uhel ar gasoni...

Nevez echuet eo e goñje gant Youenn. Prest da zimeziñ eo. Maer Loperereg avat a ra dezhañ gortoz abalamour e vank un dra bennak war e baperioù soudard. «Petra 'ta, a lavar Youenn. Ma n'eo ket Rolland a zo bet o welet ar Maer ? Faoutañ a rin e benn d'an noter fall-se !».

Ar sul nav a miz Mae 1816, brav eo an amzer. Emañ Rolland o tont endro eus Kimerc'h, pardon Sant-Løje eo, Per ha Youenn a zo o c'hortoz anezhañ e Koad ar Gêr. Kuzhet mat int, rak ur fuzuilh a zo ganto. Ar C'hevareg kozh a zo bet o kerc'hat ar fuzuilh-se dec'h d'an noz e ti Goaveg, kalvez Braspart «evit lazhañ moc'h gouez a zo o redek en va farkeier» en doa lavaret... Setu Rolland o tostaat. Met, çhañs dezhañ, n'emañ ket e-unan. Youenn ha Per ne gredont ket tennañ...

\*  
\* \*

D'al lun vintin emaint o daou adarre o c'hortoz an den, e traoñ koad Nivot ar wech-mañ. Gouzout a reont ez a Rolland bep sizhun da varc'had Brasparz.

Setu emañ o tiskenn war e varc'h dre ur wenodenn kammigellek ha strizh etrezek ar ster Rivoal. War dro dek eur eo. War droad e rank mont ur pennadig, ken izel eo ar vanell. Souden e wel dirazañ Per Kevareg. Ret eo dezhañ chom a sav ha selaou ar paotr a grog da damall dezhañ meur a dra : «Va zroc'h koad diwezhañ ac'h eus graet din paeañ div wech...».

Un taol fuzuilh a stlak a-daol-trumm, tennet gant an den skoa-chet a-dreñv ur vodenn gelenn.

E-benn toullet gant ur boled, e kouñzh Rolland war an douar. Ne lavar nemet ur ger araok mervel : «Va Doue...».

Nebeut goude ez en emgave e loen dirollet dirak ar maner. Klevet oa bet an taol fuzuilh. Pa welas ar marc'h e-unan penn e soñjas gwreg Rolland diouzhtu petra oa c'hoarvezet. «Marv eo ar patron» emezi.

\*  
\* \*

Den ne c'houie piv en-doa graet an taol. Edo ar baotred o

troc'hañ keuneud e-kichen ar poull war dro unnek eur... An archerien a erruas d'an abardaez. Ganto e kasjont Goaveg. Ne oa nemetañ hag en doa ur fuzuilh war-dro. O chaseal e veze alies. Ha Rolland en doa c'hoariet taolioù fall dezhañ. Setu perak e tiskouezas an dud anezhañ da gentañ. Merc'h Goaveg a lavaras gant piv edo bet fuzuilh he zad. Ar C'hevareg kozh a voe kaset d'an toull-bac'h ivez. Goadeg ha Kevareg a ziskouezas splann edont e foar Brasparz d'al lun vintin... Hep dale e voe daou brizoniad all ganto : Youenn ha Per...

«Lazhadenn ragaozet» a ziskle-rias al lez-varn diwar-benn Per ha Youenn e miz C'hwevrer 1817.

Petra a c'hoarvezas ganto ?

An dud a gomzas muioc'h a-enep d'an noter marv : meur a dra en doa graet a-dreuz, anat oa bremañ. Anat oa ivez droukañs ur berniad tud enepañ... Hag edo ar Roue en-dro e Paris. Setu a-walc'h evit kompren penaos e echue ar varnadenn : Youenn ha Per a voe didamallet hag a zeuas da vevañ endro e Bavedoa.

# Gerioù-kroaz

## gant Gab ar MOAL

### A-BLAEN

- 1 - Peurvuañ e vezont klevet er skolioù
- 2 - Seurt arbennigour a vez gwelet muioc'h-mui er skolioù hag en embregerezhioù
- 3 - Ar stlejerioù o deus lazhet implij ar ger-se — Gwez
- 4 - Da zastum ar glaveier — Rakger
- 5 - Gwak — Plantenn
- 6 - Kalet pe danav, mat da zebriñ — A laka ar Wenediz da vezañ du o fenn
- 7 - Ur gêrbenn en Europa
- 8 - Plantenn
- 9 - A c'hell doareañ an arc'hant e fin ar miz

- 7 - Ma ne vefe ket a dredan ne vefe ket eus an dra-se — Ur barrez e Bro-Gerne
- 8 - A verk alies al liester — Ur ster

vras en Afrika

- 9 - A c'hounez arc'hant diwar goust an dud hegredek — Goap a vez graet eus ar re-se.

### A-SERZH

- 1 - Youenn DREZENN a oa unan
- 2 - Roit gouloù
- 3 - Graet abaoe nebeut — Liamm
- 4 - Pa ri ti — Diaes e oa yevañ heptañ
- 5 - N'eo ket amañ — An eil war-lerc'h eben — Lezenn
- 6 - N'eo ket brav ober kement-se d'al laboused

